

KANTIK

ITRON VARIA SKLERDER

DISKAN

Itron Varia Sklerder,
 Mamm hon Zalver Jezuz,
 Reit, m'ho ped, d'ar pec'her
 Graso krênv ha nerzuz.

1.

Eûz a-bell e teuer
 O mamm ken dous, ken mad,
 D'ho Chapel ar Sklerder
 Da c'houlenn eur mennad.

2.

Brema, kouls ha gwechall,
 C'houi, Gwerc'hez, hon Itron,

A rei d'ar re zo dall
Sklerijen ha pardon.

3.

'Vit ho c'horf sklerijen
'Vit ho spered ive,
Ma helfond da viken
Zerviji mad Doue.

4.

Brezel a ra ar bed
Eneb ann ineo,
Ha, mar n'ho diwallet,
Satan zûr ho zrec'ho.

5.

Lemel a rei ho feiz
Digand ar Vretoned,
Mar na vent noz ha deiz
Gand ho prec'h skoazellet.

6.

Koulskoude, ma Breuder,
Ar feiz en ti ar paour
A dâll, e peb amzer,
Ouspenn arc'hant hag aour.

7.

Ha gant-se, ni ho ped,
Itrôn Varia Sklerder,
Plijet guenac'h mired
Ar feiz enn hon zier.

8.

Hag hon bezo er vro
Ann alc'houe a zigor
Dorejo an Envo,
Ar feiz : kaera tensor !

9.

Gwir eo, hon euz pec'het
Eneb ho mab Jezuz ;
Mès, 'vid-omp pa gomzfet,
Hen vo trugarezuz.

10.

War n'omp oll astennet
Ho prec'h madelezuz,
Evit ma vimp bepred
Kristenien vâd, nerzuz.

11.

Bezit hon fatronez,
O mamm garantezuz,

Hon gwir advoeadez,
Enn Env dirag Jezuz.

12.

Ha ni gano zeder
Eun deiz er baradoz :
Itron Varia Sklerder,
Bennoz dac'h, mil bennoz !

A. Paulou
Kure Janjeli.

Imprimatur :

Brioci, die 14^a junii 1894.

M. LE PROVOST,
Vic. gen.